

KENTELIOU AR GROAZ

Var don : *D'hor Mamm Santez Anna.*

DISKAN :

*Kanomp holl, kristenien,
Kanomp a vouez huel :
Breman ha da viken
Henor d'ar Groaz santel !*

Bepred, elec'h ma vo
Dirazhan Kroaz Jezuz,
Eur c'hristen a gavo
Kenteliou talvouduz.

Kroaz an tour.

Divar beg an touriou
Ar Groaz 'lavar dalc'hmad :
« Kristenien, d'an envou
Savit ho taoulagad ! »

Kroaz an hent.

Ar Groaz var an henchou
'Lavar d'an tremener :
« Guir hent bro an envou
Eo hent Kroaz Hor Zalver. »

Kroaz an ti.

Dirag holl dud an ti,
Ar Groaz ouz ar voger
A zesk da bep hini
Derc'hel mad d'he zever.

Deski 'ra d'ar bugel
Beza bepred sentuz ;
Senti betek mervel
Zo bet buez Jezuz.

D'an tadou ha mammou
E lavar Hor Zalver :
« Beillit var eneou
Emeuz prenet ken ker ! »

Kroaz an ti d'ar c'hlanvour
Zo ive presiuz ;
Ennhi e kav sikour
Da veza gouzanvuz.

Kroaz ar gador-govez.

Kroaz ar gador-govez
A ro keuz d'ar pec'her.
Bet eo ken didruez
E kenver he Zalver !

Kroaz ar beziou.

Ar Groaz var ar beziou
He deuz eun nerz dispar
D'ober d'ar c'halonou
Dougen pouez ar glac'har.

Kroaz an aod.

Ar Groaz, pa ve savet
E kichenik an aod,
A ro fizianz bepred
D'ar paour kez martolod.

Kroaz ar varn diveza.

Pa zeui, da fin ar bed,
Jezuz evel barner,
He Groaz a vo guelet
O lugerni en ær.

En eur velet ar Groaz
An dud fall a greno ;
An dud vad gant joa vraz
Er c'hontrol a drido.

Grit deomp, Salver Jezuz,
Dre verit ho poaniou,
Gant an holl dud euruz
Mont neuze d'an envou.

KANTIK SANTEZ ANNA

Ton : *D'hor Mamm Santez Anna.*

*Kristenien Breiz Izel,
Meulomp holl, en deiz-ma,
Hor Patronez santel,
Hor Mamm Santez Anna.*

E kalon peb Breizad
Doun e kaver skrivet
Hano dous ar Vamm vad
A gar ar Vretoned.

Ganthi eo bet ganet
Ar Verc'hez Mamm Doue,
Ha, dre-ze, eo savet
D'eur renk huel en Ee.

He galloud a zo braz,
He madelez ive ;
Ne zisprijas biskoaz
Peden he bugale.

Soudarded, moraerien,
Araok mont euz ar ger,
Diganthi a c'houlen
O diwall en danjer.

Ar vamm gristen he fed
Evit he bugale,
Ma vint fidel bepred
Da heuill lezen Doue.

Dalc'hmad ar Vretoned
En ho foaniou brassa
A zavas ho spered
Varzu Santez Anna.

Hirio zo ezom braz
Da c'houlen he skoazel,
Rag a bep tu, siouaz !
Ne veler 'met brezel.

Er barrez, ni ho ped,
Lakit peoc'h, union ;
Kreskit ennhi bepred
Ar gwir devosion.

Itron Santez Anna,
Hor mirit deiz ha noz,
Ha dalc'hit d'hon hench
Varzu ar baradoz.

Imprimatur :

Quimper, le 21 Janvier 1911.

EM. FLÉTER.